

Eur stereden gaër... ⁽⁸¹⁾

Eur stereden gaër ha brillant
 A zo savet en Oriant.
 Ha me a deu d'ho saludi :
 Eur blavez mad da dud an ti.

Da dud an ti ma : Blavez mad
 Dar vugale, dar vam, dan tad,
 Invantor vad dar vugale,
 Dan domestiket goudeze.

Me a vel Joseph ha Mari
 E kichen an hostaleri,
 Ne gavont ket a lojamant,
 Rag n'ho deuz nag aour nag arc'hant.

Mari a lavar gouskoude :
 « Digorit deomp en han' Doue. »
 — Quell gantho loja pinvidik
 E kramchou kaër ha manifik.

En eur c'hraouik setu ganet
 Mabig Jesus Salver ar bed,
 Astennet var eun famik foën,
 Tost dan ejen ha dan azen.

Prest eo va c'hialon da ranna
 Pa velan Jesus o krena,
 Sklasset eo e zaouarnigou,
 Hag e dreidigou gant ar riou.

(81) C'est ici le Noël du pauvre « chercheur de pain », de Plabennec. Il m'a été transmis par M. l'abbé Bodériou, curé-doyen de cette paroisse.

ET NOËLS POPULAIRES BRETONS

91

Pa deu ar brinset var ar bed,
 Ne ket gant truillou int guisket,
 En dro dezo arc'hant hag aour,
 Ar Mabig Jezus a zo paour.

Kanomp Ave maris stella,
 Meulomp an Itron Varia,
 Ha fiat voluntas tua
 Et in cœlo et in terra.

Eur blavez mad a zouetan
 D'an dud vraz ha da re vian,
 Blavez mad ha prosperite,
 Joa ar baradoz d'ho ene.

Eur blavez mad a reketan . . . ⁽⁸²⁾

Var an ton : *Jesu, redemptor omnium.*

Eur blavez mad a reketan
 Da gement den zo en ty-man,
 D'an ozac'h a d'ar c'hreg ive,
 Fortuniou caër d'ar vugale.

Deut oun da glask va c'halanna,
 N'oun ket bet c'hoas er bla-man,
 Da vloas e teuin adarre,
 M'ar bezan beo d'ar ben neuze.

Ne c'houlennan ket kals a dra
 Nemet hebken eun tam bara,
 Eur grampoezen pe eun tam kuign
 M'ar de ho madelez da rei dign.

⁽⁸²⁾ Ce Noël que nous a adressé M. Picard, aumônier de la villa Saint-Luc à Roscoff, a été composé en 1850 par Gabriel Perrot, de Saint-Pabu. Il est connu dans tout le Léon. Voyez quelques strophes dans *Feiz-ha-Breiz*, 1922, p. 355.